


YANN-VARI PENNKOAD

AR STIVELL HAN'HOULEKEN REI DOUR

Ar Helenner

n° 13

1979



DIOU
GONTADENNIG



YANN-VARI PENNKOAD



AR STIVELL HA N'HOULE KEN
REI DOUR



An diou gontadennig-mañ da heul, a zo bet embannet
e galleg war ar gelaouenn « ENFANTINES » (Editions de
l'École Moderne Française, Cannes). Lakaet int bet e bre-
zoneg gand aotre hegarad an Aotrou C. FREINET, rener
ar C.E.L. ha Skol Nevez Vence.

AR HELENNER

Dastumadenn bedagogel
a vez moullet ez-prevez
gand

AR SKOL VREZONEG

ha gand

KELH AR GELENNERIEH VREZONEG.


ISSN: 0180-0450

Rener an dastumadenn: A. MERSEY

Eil mouladur

1979

YANN-VARI PENNKOAD



Bet savet e galleg
gand klas vihan
skol TREGASTELL
(Bro-Dreger);
embannet en « ENFANTINES »,
e miz ebrel 1949.
Laketaet e brezoneg gand
Skol ar Baotred GRONVEL
(Bro-Gerne),
e 1957.

Reverzi vraz a zo.

Kemeret e-neus Yann-Vari Pennkoad e grog, e
votou-koad hag an dilhad a vez gantañ dalhmad
evid mond da ormela.

Da hedal ma vo izel ar mor, en em lak da fur-
chal e-touez ar reier.



Kavoud a ra eun ormelenn vihan, da genta.

A-greiz-oll, e-barz eun toull er herreg, e seblant dezañ gweled eun dra bennag o firbouchal. Sanka ra e benn en toull hag e wel eul legestr, eur pezh mell legestr, c'hweh lur bouez ennañ da vihan.

— Sed amañ 'vad ! Ma mamm eo 'ni vo laouen !

Ne gred ket Yann-Vari paka al legestr gand e zorn, gand aon ouz e veudou. Klask a ra trei e gein da dapoud e grog. Ya, da ! Ne hell ket tenna e benn kuit ouz an toull : yennet eo e gwask ar garregenn.

Al legestr, o weled eun dra bennag o fiñval, a ya da guz e strad ar poull.

Ar genaoueg ! Heman a felle dezañ paka ahanon, ha setu eñ an hini zo paket !

O ; me wel mad-tre, ahanout, paotr brao ! a huch Pennkoad. 'Pez ket aon ! Me da bako ! E-barz ar gastolodenn e yi ! Gortoz ma tapin ma hrog, hag e weli peseurt c'hoari a vo ganit !

Tu ebed avad d'e dapoud, ar hrog-se !



Emañ atao penn Yann-Vari gwasket etre an daou roh.

Evelato, n'on ket evid chom aze evelse !

Hag eñ d'en em zifreta. Klask a ra sach a benn er-mêz an toull. Mann d'ober !

D'ar mare-ze, al legestr, o weled ne daper ket anezañ, a zeu kuit euz e doullig hag a ya da vale a-dreuz e boull.

C'hoarzin a ra etre e biñsou... Hag, e serr neu, e ra goap ouz Yann :

Yannig-Zeiteg ! Paket ar haz gand ar gegin !

Droug ruz a zo e Yann-Vari, pa ne hell ober mann ebed ablamour d'e benn, dalhet ken diod all etre an daou roh ! Koulskoude, labourad a ra e spered : soñjezonou du a zeu dezañ, soñjezonou a ya kuit en eur ober « bouilh-bouilh » en dour.



— Lano vo bremaig, ha petra am-mo paket ? eun ormelenn vihan nemedken.

Goap a raio ma hamaladed ouzin; peder pe bemp dousenn o-devo bet, hag en em gavin brao, me, gand ma faner goullo !...

A-greiz-oll, e sant Yann-Vari eo gleb e dreid. Ar mor o chala an hini eo !

— Ar mor abaoe ! a zoñj-eh. O ! ma Doue !
poent eo din hasta founnuz tehoud kuit ahann, pe
eo greet ganin !

Poania ra. Sacha ra kemend ha ma hell, o trei
e houzeg. Krabiset eo e jod gand brennig bihan
peget ouz ar reier; daoust d'an droug, sach a ra
memestra : red eo dezañ en em ziframma alese.

Hag an dour a zav, a zav bepred; beteg e xaou-
lin e teu bremañ.

Mond a ra ar mor e toull al legestr ive, hag e
neu hemañ brao en e êz. Yann-Vari, pa wel ne
hell ket en em ziluzia, a zoñj dezañ emañ ar mor
e vond da zavel uhelloc hag e vo beuzet.


Duoh-dua a teu e venoziou en e benn. Sodi a
ra ! krog eo d'en em zifreta, da ziskrapa, da youhal
forz e vuhez :

— Skoazell ! Skoazell din !

N'eus nemed ar pesked avad a glevfe anezañ,
hag ar hrenk o neui tro-dro dezañ. Est eo ar bes-
keterien d'ar gêr, adal m'eo bet kroget ar mor da
bignad. Est int kuit, pa ne oant ket mui evid
ormela.

E-unan-penn emañ Yann-Vari, e-unanig kêz !

Sevel a ra an dour outañ beteg e houriz.



Mond ha dond a ra al legestr, o tostaad ouz ar paotr, da weled ha daoust ha ne vefe ket mad da zebri ar pezh a zo o fiñval eno.

En e vamm muia-karet e soñj Yann-Vari. Paour-kêz mamm ! Gweled a ra anezi, evel ha pa vefe dirag e zaoulagad, aze, dres el leh m'emañ al legestr oh ober goap outañ. Gweled a ra anezi mad-tre. Kroget eo an nehamant enni a-benn bremañ. Goulenn a ra digand an dud o tond diouz an aot :

— Peus ket gwelet ma Yann-Vari ?

— Yann-Vari ? Nann, n'on-eus ket gwelet al liou anezañ.

— Boazet e oa da veza aze da ziv eur, hag emaoñ dija en tu-all da deir eur.

Sevel a ra bepred an dour.

En em zifreta a ra gwasoh-gwaso Yann-Vari, hag huchal kreñvoh-kreñva :

Skoazell ! Skoazell din !

A-greiz-oll, e teu an dour en e henou. Garmi a ra :

— Bouilh bouilh bouilh lou-lou...

Prenna ra e veg, gwaska ra war e vuzellou, serri ra kloz e zaoulagad.

An dour a zav atao. Tremena ra bremañ dreist e benn.

Ne fiñv ket kalz mui Yann-Vari Pennkoad, tamm ebed ken zoken, koulz lavared, hag e chom evel ha pa vefe maro dija.

Neuze al legestr a zeu tost dezañ; gweled a ra ne fiñv ket ken an tamm tra-ze... C'hoant a zeu dezañ gouzoud ha blaz mad a zo gantañ... Paka ra eur skouarn etre e veudou ha staraa kaieñ evit distaga eur bastellad diouti.

Kemend a boan a houzañv Yann-Vari m'en em laka adarre d'en em zifreta... hag, en eur heja-diheja e benn, — ouf ! setu eñ sachet er-mêz euz an toull.

Ken buan all e sav endro a-rez an dour. Emañ e baner-ormel o neui e-tal e gichen.

Tapoud a ra e grog ha setu ar paotr war-lerh al legestr, o harmi, fuh ennañ :

— Bremazon, te vo da gaoud eur galkennad war da henou, loen louz ! (2)

Kompren a ra al legestr ar brezoneg, eveljust; hag e kompren ive emañ dishualet Yann-Vari bremañ. Klask tehoud kuit a ra neuze.

Pennkoad avad a dap peg ennañ gand e grog hag a daol anezañ en e baner. Dispaha a ra al legestr endro ma hell, nemed tro Yann-Vari eo d'ober goap outañ :

— Lavaret 'm-oa dit e yafes e-barz ar gastolodenn !

(2) E brezoneg er Kêr Kallig.

Hag en e benn e-unan e soñj memez tra ar paotr :

— Ya... nemed eun tammig muioh, al legestr eo a zebre ahanon !

Nebetoh-neheta eo bremañ mamm Yann-Vari. Deuet eo endro an oll dud d'ar gêr : ne hell ket mui goulenn netra outo. Beb eil vunutenn e teu-hi war an hent, da weled ha ne zispak ket he mab. Trei ra he fenn beb tra ma klev eun trouz bennag, o kredi eo eñ a zo o tond.

— A-greiz-oll, trouz eur botou-koad. An nor a zo digoret. Yann-Vari an hini eo ! Pebez eurvad !



Petra zo erruet ganit 'ta ? N'eus neudenn zeh ebed warnout !

Chomet e oa bet ma fenn ganin yennet etre diou roh, ha darbet eo bet din beza beuzet. Fall ma fesketez ! N'em-eus paket seurt ebed, nemed eun ormelenn vihan... Sell mamm, sell e-barz ma faner !

Sevel a ra ar vamm golo ar baner hag e sell e-barz : « O pebez legestr kaer ! »

Hag hi pokad da Yann-Vari.



Bez' e-neus Pennkoad eun tammig poue en e skouarn hag en e ziouchod. Kement-se ne vern ket avad : laouen eo da veza eno.

Gwiska ra dilhad seh hag e ya da domma e korn an oaled, e zaouarn astennet war-du an tan.



AR STIVELL HA N'HOULE KEN REI DOUR

Kontadennig,

lakeet e brezoneg diwar ar skrid

savet e galleg gant

bugale Skol SAINT-MARTIN-DE-QUEYRIERES

(Hautes-Alpes),

bet embannet e miz Meurz 1946


war « ENFANTINES » (Cannes).

Bez e oa eur wech eur paotrig, sehed braz dezañ,
ken braz e zehed ma ne oa ket mui evid distaga
eur gêr, koulz lavared.

Seh e oa e deod, seh e gorzailhenn, ha ken seh
all e vuzellou.

Mond a reas betek ar stivell, hag e lavaras :

— Stivell vihan, braz eo ma zehed : ro din eur
bannahig dour da eva !



O, ya da ! eme ar stivell. Me a ro dour da gemend hini e-neus sehed.


Hag e astennas ar paotr bihan e zaouarn dirag genou ar stivell evid leunia e voz.

Siwaz, bez e oa ar bugel eur paotrig digempenn ha louz, eun druez ! Ha pa welas ar stivell e zaouarn du divalo, e taolas evel eun dufadenn : « Ec'h ! », hag e hourdrouzas, droug enni :

Nann ! nann ! ne skuilhan ket dour e-barz daouarn evel da re-te, eun doñjer selled outo !

Ouz e zaouarn e sellas ar paotrig : du ha kailharet e oant, saotret gand beb seurt mohaj. Eur vez ruz a zavas ennañ, hag e kuzas e grabanou a-dre d'e gein.

N'helle ket padoud avad gand ar zehed. Klask a reas eva o tigeri e henou dindan ar wazienn zour o tivera diouz ar stivell.



N'e-noa ket soñjet ar paotr e oa bastrouilhet e veg, taraset-oll gand roudenou loustoni ha druzoni...

En eun taol, e chomas a-zav ar stivell da deurel dour, ha ne hellas ket al loustonñ bihan paka an disterra beradennig war e deod.

Izel e glipenn, ar paotr a droas kein evid mond kuit, mouzet an tamm anezañ.

Dalhmad avad e houzañve sehed kriz, ken na zave an tan en e gorzailhenn.

Dond a reas eur jao da eva dour e-barz an neo e-tal ar stivell. Ne gredas ket ar paotr bihan ober eveltañ : re louz e vije bet.



Dond a reas goude eur vaouez, eur sailh ganti evid kerhad dour da aoza he zou-benn.

Banne ebed ne zeue mui er-mêz !

— Piou 'ta an hini e-neus kaset ar feunteun-mañ da hesk ? a huchas ar vaouez, droug braz enni... Piou 'ta hennez ? ..

Merhed all a dostee, o tond da gerhad dour, int ive. Ha setu neuze klemmou ha chaok e-tal-kichen ar stivell !

Ha ma zaout ha n'o-deus bet banne ebed da eva !

Ha penaoz e rin-me ma hafe ?

Ha penaoz ober evid gwalhi al leur-zi du-mañ ?

Ha me hag a felle din kempenn ma hrouadur kêz !

Ha me ha n'am-eus ket skaotet ma listri !



An oll, dre ar gêriadenn a houlenne dour : an dud, ar zaout, ar hezeg, hag ive ar chas a gar lapa e-barz ar waz, hag an houidi, hag ar glesker, pa ne hellent mui mond war-neu er stêr !

Eur vaouez koz, daoubleget he hein gand an oad, a zeuas da houlenn digand ar stivell :

— Ahanta, feunteun, te a faot dit lakaad ahonom-oll da vervel gand ar zehed ? Ha ken skuiz-se out-te eet o teurel dour er-mêz ?

— Tra ! a respontas ar feunteun, rei a rin dour adarre p'e-nevo ar paotrig-mañ kempennet e zaouarn hag e veg.

Eur zahad mez ennañ, c'hoant awalh e-noa ar paotrig paour d'en em walhi, nemed peleh kaoud dour ?


Eet e oa ar feunteun dá hesk, ha ne jome lom-mig dour ebed ken e-barz ar waz.

Dond a reas da zoñj dezañ euz eun eienenn goant anavezet gantañ du-hont, war ar menez, e-kreiz an tiriennou braz.

Hag eñ da redeg kuit dre eur wenojenn veineg a zave etrezeg kreh ar menez, war-du ar feunteunig.

Houmañ, avad, pa zigouezas, ne gavas banne dour ebed enni kennebeud !

Dirolla a reas al loustoñ bihan da leñva, an taol-mañ. Ha tra ma ruilhe e zaelou, e torche e ziouchod gand e zaouarn. Ken na zeuas e veg ken du hag hini eur marhadour glaou.



vell e-touez reier an uhelennou.

Evelato, e talhas ar paotr da vond gand e hent. Sevel a reas uheloh eged an tiez diwez, o klask a beb tu eun eienennig bennag, forz pegen dister e vije.

Allaz ! di-zehet e oa kemend feunteun e prajeier ar menez, mouzet kemend sti-

Penaoz ober? Eur skudelladig zour a vije bet trawalh d'ar bugel paour evid gwalhi e zremm... Peleh avad kavoud an disterra banneig?...

Pignet e oa bremañ ar pootr uhel uhel war ar menez. A-greiz-oll, e toull-kleuz eur roh, e welas eur bernig erh, chomet e dilerh ar goañv, kousket kaer eno, er gwasked, dres evel eur bugelig en e gavell...

Ha setu! a huchas ar pootrig, o tridal gand al levenez. Bremañ e hellan 'n em walhi!



Hag eñ neuze kemer dornadou erh ha rimia
starta ma helle,
e zaouarn,
diavêz ha diabarz,
hag e zouarzorn,
hag e oll vizied.

Ha pa oe kempenn brao e zaouarn, e tilouzas
gand evez

e veg,
e houzoug,
e ziskouarn.

Goude-ze, sehed braz atao gantañ, e kemeras-
eñ eun tamm skorn hag e sunas anezañ da fres-
kaad e henou.

Neuze, e teuas soñj dezañ e oa poent dond
endro d'ar gêr.

Sur awalh, an oll dud, en traoñ, a oa nehet, o
hortoz dour.

Hag eñ hasta buan.

O tiskenn diwar ar menez, e tihune an oll feun-
teuneier morgousket :

Red eo dit teurel dour adarre, eienennig
vihan ! Sell, me a zo kempenn bremañ, penn-kil-
ha-troad !

- O, ya ! eur paotrig koant out adarre evel-se !

Heb dale e oa erru ar paotr er gêriadenn, hag e
welas an dud bodet e-tal ar stivell, o hortoz an
dour da zond er-mêz.

— Stivell vad, stivell vad, ro dour deom buan-
ha-buan da eva. En em walhi a rin bemdez diwar
vremañ.

— Mad eo, eme ar feunteun, sed amañ dour
mad ha sklêr evidoh oll.



Hag en em lakaas adarre ar stivell da rei dour
kemend ha ma helle ober.

Hag ar mammou a gargas o zailhou, hag e
helljont aoza o zoubenn hag o hafe, ha gwalhi
leurioù o zier ha kempenn o bugaligoù.

Hag ar zaout, ar hezeg hag al loened all o-
devoe dour da eva diouz o zehed.

Hag ar chas a gavas adarre dour da lapa e-barz
ar waz. Hag an houldi hag ar glesker a hellas en
em daola endro da neuñ e-barz ar ster.

**HA DIWAR AN DEIZ-SE, NE OE GWELET
BUGEL BEG LOUZ EBED KEN DRE AR VRO !**



